

## RIMADELLOU

Ken - tan pe oen di - me - ed, al - lons ma mi -  
gnon al - lons ge, Ken - tan pe oen di - me - et  
En eur stad trist on la - ket.

Kenta ma oen dimezet,  
Allons ma mignon ; allons ge !  
Kentan ma oen dimezet  
En eur stad drist oen laket.

Laket oen er stad trista,  
N'am boe na skudel na loa.

N'am boe na loa na skudel bri,  
Na boed gante da zibri.

Laret oe d'in ober krampoez,  
E oa c'hoaz ma dour er Blavez.

Da glask dour e oen kaset,  
Gant eur podig pri torret.

Gant eur podig pri torret,  
Hag eur goz sailh didalet.

Ma rozel ha ma sklinsen,  
A oa c'hoaz er bod kelen.

Ma bleud 'oa er Gwemene,  
Ha ma fillik e Kerne.

Kouls eo d'in mond d'am gwele,  
Krampoez na rin ket fete.  
Ma bleud 'zo ar vilin vras,  
Ha ma aman er Goz-felc'has,  
Ma foudez 'bars ar boudiri,  
Pellik eo d'in mond da viti ;  
Ma maën krampoez en Montroulez,  
Ha ma lardigen en Keraëz,  
Ma rastel 'bars ar villh fao,  
Ha ma rozel er bod deilho.